


I.Bourc'hizien, kenwerzh, morianeta ha sklaverezh en XVIIIe kantved

Pe zoare e laka ar c'henwerzh trevadennel da binvidikaat bourc'hizien varc'hadourien Europa hag e sikour da ledañ ar sklaverezh?


A / Europa e-kreiz ar c'henwerzh etrevroadel

1. Europa galloudus

A-dal ar XVI e kantved, e sav an Europiz **impalaeriezhioù trevadennel** en tramor. En XVIII e kantved o deus ar Stadoù **spagnol** (Spagn Nevez, Granada Nevez, Filipinez) ha **Portugalad** (aodoù e reter Amerika su, Angola, Mozambik) brasañ impalaeriezhioù met ar **C'hallaoued** (Louisiana, Kebek) ar **Saozon**, ar **Proviñsoù Unanet** o deus ivez trevadennoù ha kontouerioù Pondichery evit Frañs)..



B. Oad aour an eskemmoù kenwerzh en XVIIIe k



Er c'hwezekvet kantved, an Europiz a gas eus Europa d'an trevadennoù an holl broduioù ret evit buhez pemdeziek ar an drevadennerien evel produioù manufakturet, edoù, gloan, gwin,...) ar pezh a grou ur obererezh pouezus er maezoù tro-dro d'ar porzhioù europat-se. En distro, ar listri a zegas **produioù ekzotek** (sukr, kafe, kakao,...) a vez adgwerzhet ker-ruz e pep lec'h en Europa.

C. Pinvidikaat a ra ar c'henwerzh-se porzhioù-mor eus an aodoù europat

Ar c'henwerzh bedel-se a binvidika an takadoù aod e Kornôg Europa. Ar porzhioù bras evel Naoned, Londrez pe Bourdel a binvidika ar c'hêrioù e-lec'h ma sav ar varc'hadourien binvidik savadurioù kaer pe **ostelioù prevez**

Diwaniñ a ra ur renkad sokial nevez ar **vourc'hizelezh** nevez enni an **drafikourien**, **paramantourien** hag **ar varc'hadourien** é postiñ argant er c'henwerzh hag é vevñ e-giz aotrouien vras.

Kemer a reont perzh e melestradurezh ar c'hêrioù hag o deus savet **ostelioù** prevez. Sevel a reont gwir dinastiezhoù marc'hadourien é treuzkas d'o bugale o aferioù evel da skouer Ignace Advisse des Ruisseaux e Gwened pe familh Nairac, familh Bonnaffe e Bordeaux).



Ar **vourc'hizien** varc'hadourien a zeu da vout rummadoù sokial mestr er c'hêrioù a-drugarez d'o madoù divent, evel familhoù Nairac pe Bonnaffé e Bourdel.



Bourdel, ur porzh livet get Joseph Vernet

Er XVIII vet kantved e kresk ar c'hêrioù àr dalbenn ar Meurvor Atlantel a-drugarez d'ar c'henwerzh-mor.

I. Obererezhioù ar porzh



Barregezhioù labourer

**B5: kompren ha dielfenniñ dielloù
Domani 3**

deskriviñ ur morlivadur



Diell 1: Gwel ar porzh Bourdel get
Joseph Vernet

Joseph Vernet, ganet e Avignon e 1714 a zesk liviñ get e dad. Beviñ a ra en Italia , e Roma etre 1734 ha 1753 e-pad ugent vlez : dont a ra da vout **morlivour ha livour an gweledvaou** a-feson. E 1750 ar markiz Marigny dre goulenn ar roue gall, Louis XV, a urzh dezhañ taolennoù porzhioù bras ar rouantelezh. Mont a ra Vernet a porzh a borzh evit sevel ur brastres pep porzh. E-pad dek vlez e labour Vernet evitañ : 15 taolenn e voe livet get div livadenn a reprezant ar porzh Bourdel hag e 1762, skuizh get e vuhez-red e baouez. Chom a ra e Pariz é labourat evit kliented ar bed a-bezh betek e varv e 1789.

Gwel porzh Bourdel

Titl: gwel ul lodenn a porzh Bourdel ha kêr Bourdel, skeudennet e tu ar Salinières
Arzour: Joseph Vernet (1714-1789)
Deiziad: 1758
Natur ha teknik: livadur eoul à lien
Stil: morlivadur
Urzh: ar roue Louis XV

Mentoù:

L:2,63m x H:1,65m

Lec'h:

Mirdi broadel ar verdeadurezh , Pariz

Morlivadur: ul livadur liammet get ar mor, ar porzhioù, ar bigi, an arvorioù. Ganet eo Er XVIIvet kantved en Izelvroioù hag en Italia. En XVIIIvet kantved, Joseph Vernet, livour gall a za da vout unan brudet-tre er bed a-bezh.

Lec'hienn

http://www.musee-marine.fr/programmes_multimedia/vernet/



II. Bourdel, ur porzh –mor bras war an arvor atlantel

Penaos e c'hell obererezhioù porzh-mor kas pinvidigezh da Vourdel hag d'hec'h annezidi en XVIII vet kantved?

	Diell implijet	Mennozh pennañ
Ur c'henwerzh dre vor bev-buhezek	Diell 1 , 3, 4,5	
Trafikourien o pinvidikaat	Diell 2 ha 5	
Ur gêr treuzfurmet dre ar c'henwerzh	Diell 2,4,6	



Les grosses fortunes des négociants de Nantes et de Bordeaux ont étonné leurs Contemporains(...) Un armateur peut faire fortune en dix ou quinze ans. Richesse dont témoignent d'ailleurs les beaux hôtels particuliers des « messieurs » des deux ports(...) Dans un état des 250 plus grosses fortunes dressé en 1726 par le maire de la ville, on en compte 24 totalisant plus de 200 000 livres-une somme considérable. Or toutes ces familles fortunées, ou presque, ont des parts dans les armements négriers(...) les profits des Nantais et des Bordelais ne viennent donc pas de la traite négrière, mais plutôt du commerce des denrées coloniales. Denrées coloniales(sucre, coton, etc...) bel et bien obtenues, toutefois, grâce au travail des esclaves.

Diell 3: Hervez Ph. Haudrière, « la richesse de Nantes et de Bordeaux L'Histoire, gwengolo-here 2003



Diell 2:

Hôtel Nairac a oa en XVIIIvet kantved d'ur marc'hadour daet da vout pinvidik e kenwerzh ar sukr. Hiziv-an-deiz eo savadur meur ar gêr Bourdel

Amateur: paramantour

Colonial: trevadenn

Bourgeois: bourc'hiz

Négociant: marc'hadour


Négoce: merc'hadour

Sifroù-alc'hwez:


> 1700: 45 000 annezad

> 1790: 110 000 annezad

LE TRAFIC DES PORTS NÉGRIFIERS EUROPÉENS (1500-1815)




Diell 5: kenwerzh ar porzh Bourdel en XVIIIvet kantved



II) Morianeta treuzatlantel hag ekonomiezh plantadeg

A. Milionoù a sklaved deportet

Diell 1: ur charreadeg sklaved




An Afrikaned du a dremen da varc'hadourezh, skrapet e vezent pe prenet get rouaned pe marc'hadourien sklaved anvet **morianetaerien**. Goude-se e vezont kaset war-zu an aod e-lec'h ma vez eskemmet anezhe get kabiten ar **listri-morianeta** a-enep armoù, boeson pe danvezioù.



Diell 3:
marc'hata etre
marc'hadourien
europat ha
senegaliz.
(engravadur
Grasset de Saint
Sauveur, 1796)
Goré: enezenn er
Meurvor Atlantel
a-dal Senegal
Tro-gouzoug ar
sklav

Marchand d'Esclaves de Gorée

B. « Treuziñ ar C'hreiz » *Le Passage du milieu, tro-lavar evit termeniñ an treizhadenn eus ar meurvor Atlantel*



Diell 1: Troc'h ar lestr trafikiñ sklaved: ar Marie-Séraphique

Dourlivadur savet diàr goulenn ar paramantour ar Marie-Séraphique, lestr morianetaer a Naoned, tro-dro 1770. Prenet en deus ar c'habiten Gaucy 307 sklav(190 paotr, 58 maouez, 59 bugel). Paramantet eo bet ar lestr get ar paramantour-marc'hadour Jacques Barthélémy Gruel. Parket eo ar sklaved àr an etrepont, da lâret eo an estaj lec'hier edan ar pont. Edan an etrepont, ez eus boued(bara, fav, riz...), barrikennadoù dour niverus ha poultr kanolioù. Mont a ra betek Sant Doming

Treizhadenn ar Meurvor Atlantel a bad meur a sizhun hag a zo gwall-start. Berniet ha chadennet e strad al listri, kalz sklaved a varv get kleñvedoù, skuizhder pe en em lazh: war-dro 10% a varv e-pad an treuzkas. Goude ar veaj-se, ar brizonidi afrikan a vez gwerzhet ha dont a reont da vout sklaved. Anvet e vez ar c'henwerzh-se an **trafikerezh morianeta**.

Pal ar morianeta eo **kinnig dornioù d'al labour-douar ha poblañ** an trevadennoù en Amerika.

En em led en Amerika an **ekonomiezh-plantadeg**.

III. Ar sklaverezh en trevadennoù

A. An ekonomiezh-plantadeg



Perc'henn war ar plantegoù a vag ar marc'had europat eo an drevadennerien europat


En trevadennoù gall e labour ar sklaved a labour edan statud **ar C'hod du** e 1685 : o mistri o deus gwirioù àr buhez ha marv o sklaved. evit ar c'holonioù gall, sujet int d'ur mestr.

B. Ar vuhez er plantadegoù

Diell 5: benvegoù evit ar sklaved

Engravadur saoz, XIXvet
kantved

Pal ar maskl evit difenn
groñs d'ar sklaved en em
lazhiñ é tébriñ douar. An
dro-gouzoug get ur forc'h a
oa evit parrad ar sklav da
achap er strouezheg



Library, Londrez
ouget betek ar vilin evit
l'ar mestr-micherour, marse

An darn vrasañ eus ar sklaved a vez lakaet da labourat el
labourioù-douar.

Fall-kenañ eo o magadurezh hag o lojeiz, hag alies e vezont
kastizet en o c'horf.

Rouez eo an dieubidigezh, ha ne bad ket buhez ar sklaved
ouzhpenn dek vloaz.

C. Harz doc'h ar sklaverezh



Toussaint Louverture



Sklav é tec'hout kuit= maron

A-wechoù en em sav ar sklaved a-enep evel e Sant-Doming ha tec'hout kuit: setu ar pezh a vez anvet **MARONIEZH**;

Bez ez eus Europiz 'zo en em sav pe a zisklêr torfedoù ar sklaverien hag a stourm evit nullañ ar varc'hadourezh du hag ar sklaverezh.

Daoust ma'z eo bet engouestlet ar galloudoù europat pennañ da nullañ ar varc'hadourezh du e 1815, e kendalc'h houmañ betek ar bloavezhioù 1860